

Le bremañ


NIV.93 MEZHEVEN 1989

15 Iur





LIZHIRI



Skipailh ker "Bremañ" !

Pell zo on komanantet, met diùs e kavan ho kelaouenn atav. E 1983 e oa ar brezhoneg nemetken abeg va c'houmanant, met gant an amzer on deuet da vezañ a-du gant ho mennozioù.

"Tremenet" int politikerien a-sehou hag a-gleiz. An dazont a zo a'ar re c'hlas. Mat eo ivez stourm evit ar rannvroioù hag ar yezhoù bihan, rak ur stourm evit ar gouzavusted eo.

Gant va goure'hemennoù vat hag a galon ganeoc'h.

S.G.: daoust hag e vefec'h da-dennet gant ur "rubrik" diwar an anvioù-tud ? (met kement-se n'eo ket gwall dost ouzh stourm an Emsav ?).

D'hol lennerien da respont da z-Dominig Allain, o skrivañ da v-"Bremañ"8 straed Hoche Roazon

PROFOU azalek miz Here da viz Mae 89

R. Verniseau (Trevero-D-)

Daoust da greek gwerzh ar c'houmanant e chomin feal a'ar gazetenn. (Kavout a reot eta ur chekem a-gevret gant al lizherig-mañ). Komanantet on abaoe bloazioù ha ne c'hellfen ket diouerñ deus Bremañ.

Keit ha ma vo dibar ar gazetenn e kendalc'hin da lenn anezhi.

Evel just n'eo ket peurvat met ne fell ket din klemm na tabatañ war ar poent-mañ. Re a c'hervioù gros a lenner a-wechoù en ho pannoù.

Kendalc'hit gant ho labour.

- Michel Deligne 30 l, Alain Le Gal 30 l, Yves Rosmorduc 30 l, Jakez Merel 80 l, J.M.Mocaer 80 l, M.F. Lestic 80 l, M.Laure Leduc 30 l, Jean Boulbria 30 l, J.M. Mahe 30, Klaod an Duigou 30 l, Loeiz Bellec 30, Robert Carré 80, Per Even 30, Ronan An Henaff 30, Stefan Moal 30, Robert Perroud 30, Aline Vorc'h 30, Loeiz Poisson 40, Philippe Oillo 80, Andre Lavantant 80, Didier Jegou 30, Jean Duchet 30, Alan Hemeury 30, Gwenael Diquelou 50, Joel Donnant 30, Per Bernard 30, J.P. Quelvenec 30, Robert Thebault 30, J.F.Ollivier 30, Yann Guicheteau 30, Jean Follezou 30, François Louis 30, Yvon le Gall 30, Jean Moulicc 30, Marcel Rimpot, Gireg Konan 30, Jean Kerforme 30, Marcelle Kere 30, Fransoaz Jolivet 30, Y.F.Kerneis 40, Noel Peyr 40, Marsel Giraudeau 80, Frank Baron 180,

- Mikael Konk 30, Per Even 24, Per Jack 20, Yann ar Meur 20, Yann Raynaudon 30, Luc le Lay 30, Daniel ar Gevell 30, Gilbert Kerouanton 30, YB.ar Blei 30, Ivona Marzin 30, Loig Fra-boulet 70, P.Kerisit 80, Erwan Vallerie 380, Herve Masson 500, Paol ar Meur 30, Yvon Bordiec 30, Mikael Bertin 30, Gerard Bailloud 30, Deneza Thepaut 30, Dominig Kervegant 80, Gilbert Bitsch 80, G.Abherve Gwegen 50, Paskal Marc'hég 150, Erwan E-venou 50, Mikael Treger 50, Yves Jardin 50, Thierry Madeg 50, YF Jacq 50, JY. Allain 50, Arnaud Viez 50, Jean Chapron 50, Elizabeth Coin 50, Rane ar Gleau 50, J.Y.Le Goff 50, B. Cadoret 50, R.Vernisseau 100, Salaun 50, Loig Penneq 100, ha Fanch Jestin 150. ■

Hollad : 4 784,00 lur (9.6.89)
Trugarez vras d'hol lennerien.

LENNERIEN VAT

N'omp ket evit gouzout petra c'hoarvez en ho pro ma ne gasit ket keloù dimp. Gortoz a reomp eta diganeoc'h kelaier, pennadoù, tannoù kazetennoù zoken, lizhiri, aliou...

**skoazellit
"bremañ" ho kelaouenn
koumanantit,
adkoumanantit buan !
150 lur ar bloaz nemetken !**

BREMAN

8, STRAED HOCHÉ 35000 ROAZON

Dominig Allain (An Oriant)

POLITIKEREZH

DILENNADEG EUROPA SIMEONI EN ORIENT



Annaig GARS (EMGANN), Herri GOURMELEN ha GWEGAN (UDB), Massimu SIMEONI (UPC), hag Antoine MARCHETTI (A CUNCOLTA) - merc'her 24 a viz Mae - en Oriant -

listenn ar Re C'hlas

Ger vel a ra UDB, Emgann ha POBL da votiñ evit Max Simeoni, a zeu da drede war listenn ar Re C'hlas, e dilennadeg Europa. Ur c'henlabourer aus UDB a vo gant Simeoni pa vo anvet e Strassburg, ha chom a ray eno a-hed e amzer tra ma vo ar Re C'hlas anvet o lezel o lec'h gant re all al listenn goude ur bloavezh.

"Kenemglev evit Rannbarzh Breizh", a c'halv an dud da chom hep votiñ, rak "ne vo nemet 2 gannad evit Breizh pa vije bet 6 pe 7 ma vije bet kiniget listennoù rannvroel -"hag a damall da Yves Cochet, Kuzulier-kêr e Roazhon, ha niverenn 4 war al listenn "c'hlas" da glask "rastallat mouezhoù ar Vretoned" : disemglev eta etre KRB hag ar Re C'hlas, pa oa bet emglev gante e Roazhon e dilennadeg-kêr. ■

Azetet ouzh an hevelep taol en em gave UDB hag EMGANN en Oriant d'ar gemer Massimu SIMEONI (UPC) hag Antoine MARCHETTI (A CUNCOLTA). Deut e oa ar Gorsed evit displegañ da emsaverien Breizh ar penaos hag ar perak aus plas SIMEONI war listenn ar re C'hlas evit dilennadegoù Europa. Daou fed zo da dennañ eus ar gejadenn-se. Da gentañ en deus diskleriet SIMEONI en em ginnig e anv holl pobloù gwasket Stad C'hall ha labourat e Brusel hag e Strasbourg evit sevel Europa ar pobloù. Da eil e oa ar wech kentañ da UDB hag EMGANN ober un dra bennak a-gevret. Ar wech kentañ dezhe ivez kaout an hevelep savpout war dilennadegoù. An div gevredigezh a skoazell SIMEONI en dilennadegoù-se hag a c'halv eta da votiñ evit al listenn kaset gant Antoine WAECHTER. ■



Antoine Waechter

Gw.C.

EUSKADI

PROSEZIOU

Karget eo bet an devezhiou diwezhañ evit barnerien Pariz ! Dalc'het zo bet e fin miz Mae proseziou Babi Bidav, Philippe Bidart ha Ttotte Echeveste. Kondaonet eo bet Babi da 2 vloaz (graet gantañ) mui 1 bloavezh goursez. Gortozet eo an devezhiou-mañ da zistreiñ d'e vro, met... dalc'het e vo 10 devezh ouzhpenn en toull, (ar prantad evit ober galv) e ken kas, moarvat e savje keuz enañ hag e kavje gwelloc'h chom en toull ! Evit Ph. Bidart eo bet diskleriet ar "relaxe". Keleier mat a-walc'h evit ur wech met arabat evit se ankounac'hat Ttotte Echeveste a oa barnet asamblez gant Philippe Bidart. Ampellaet eo bet e brosez betek an 3 a viz Gouere rak ne oa ket gouest da heuliañ an divizoù ken, fall e oa e yec'hed. Div wech eo chomet semplet e-keit ma oa goulennaetaet gant ar prezidant. Met, evel just, ar "sponterien" evit ar stad c'hall n'int ket tud ; gwashoc'h eget loened gouez ne lavaran ket ha gwirioù Mab Den ne dalvezont ket evito. Neuze, nac'het o deus lezel anezhañ da vont da c'hortoz miz Gouere. 15

kilo en deus Ttotte kollet en toullbac'h... dibaoe rentañ-kont diwezhañ ar medisin-enklas-ker en doa gwelet anezhañ war goulenn ar ministrerezh. Hervez ar rentañ-kont-se e oa mall bras kas Ttotte da ospital Garches hag ouzhpenn-se boustañ anezhañ a-zoare. Renner Fresnes en deus nac'het.

Ur strollad mezeien euskarat Medikouk, a zo o vont da zougenn klemm a-enep d'ar pennlocaoc'h-se. Evel-se e vez graet e Bro-C'hall e 1989. Hag ur vezh eo. Met ur vezh eo ivez e c'hell ar stad c'hall kenderc'hel disourci gant doareoù seurt-se hep na savje mouezh ar stourmerien. Emañ an Euskariz o c'hortoz. Dipitet-bras int o welet ar c'henskoazell o vont en-dro e-keñver repuidi ar C'hreistaiz nemetken. Erru int skuizh o welet e vez graet fae war stourm an Iparralde. Piv oar ha ne vo ket graet fae warnomp un devezh bennak ivez ? Re ziwzhat e vo da glask skoazell eus an tu-se. Re ziwzhat evit souezhiñ ha klemmichat. ■

Mich B.



BREIZH

URANIOM

D'ar Sul 28 a viz Mae e voe dalc'het ur vanifestadeg e Berne a-enep COGEMA he deus c'hoant da zigoriñ mengleuzioù uraniom er vro. Ouzhpenn 1000 a dud a oa en gavet eno evit lavaret krenn o enebiezh d'ar raktres-se. Tud ar vro, dreist-holl, eo a oa tu da welet, met ivez stourmerien boas ouzh seurt emgavioù, re an Emsav dreist-holl hag un nebeud re C'hlas. Ur bourmenadenn er c'hoad betek al lec'h da c'hoanta COGEMA lakaat he c'hrahanou warnañ hag en em gawe an dud en ur frankizenn abenn selaou ar brezegerien : tud ar c'homiteoù enep-uraniom, re C'hlas hep faziañ re an Emsav : UDB hag EMGANN. Pouezañ a reas ar re-mañ da unañ an nerzhioù : "Mamet hon eus gounezet e Plogoff, unaret e c'houlvezomp amañ !" Achuet e voe an devezh gant ur fest-noz vras laouen ha plijadurus.

=====

MENGLEUZIOU URANIOM :

DANJER BRAS

=====

Krog eo ar stourm da gemer lañs e kreiz Breizh a-enep da COGEMA. Un dra vat eo ha poent eo rak grevus-tre eo ar pezh a c'hoari e pennoù tud COGEMA. Kalz a uraniom zo e douar Breizh. Dizañjer eo keit ha ma chom e-barzh. Pa vez tennet avat, e vez un afer all. Ar radon, gaz kontamunet bre a nij kuit hag a ra e reuz e-pad pell er vro. Ur gudenn all eo ar restachoù-mein. Betek-hen n'eus bet kavet diskoulm ebet evite. Kontamunet e chom ar restachoù-se e-pad hir hag hir amzer. N'eo ket ur stourm lec'h zo da vezañ kaset war-raok, rak evel ma tiskouez ar gartenn amañ e-kichen eo un dachenn vras a Vreizh zo e soñj COGEMA. Kreñvaet eo homañ, bremañ p'he deus en em glevet gant he c'henseurtet a Alamagn : VEBU. Un emglev a-bouez etre an div gevredigezh a ra war dro an uraniom hag an nerzh nukleel war kein ar pobloù evel hini Breizh. Hag en em glevet a ray ar Vretoned ivez evit difenn ar vro ? ■

Gwenael Caradec

BREIZH

COGEMA ER-MAEZ !



COGEMA ER-MEZ ER VRO !..



BRETONEZ BACH'ET

Harzet e oa bet 9 a dud gant ar bolis dimeurzh 6 ha dimec'her 7 a viz Mezeven e Brest, en Orient hag e Pariz. Daou a voe kaset en toull : Gilbert CABON ha Jean-Yves MEUDEC, stourmerien eus EMGANN, tamallet dezhe bezañ dalc'het danvez-tarzh ha bezañ ezel A.R.B.. Daou all a voe tamallet met laosket da vont : Didier BOUFFAUT ha Daniela BRETON. E karg eus an doser emañ ar barner VILLEMEN. Tamallet eo bet ar pevar stourmer goude 96 eurvezh e dalc'h ar bolis. Doareoù heugus he deus implijet a-enep d'an damallidi, ar pezh en deus lakaet kevredigezhioù evel L.D.H. (Kevredigezh Gwirioù Mab Den), C.G.T. (Kevredigezh al Labourerien) hag EMGANN da sevel o mouezh. Ur c'homite skoazell d'ar brizonidi zo bet krouet e Brest. ■ Gw.C.



Stourm Ar Brezhones

LABOUR NOZ PROSEZ DIWAN HA SAB

25 a banelloù zo bet distrujet etre Pielan-Veur ha Pempont gant izili eus SAB bro-Roazon d'ar 17 a viz Mae. 39 a banelloù zo bet livet war gourhent tro-kêr Roazon. 16 a banelloù zo bet divinset ha distrujet, 13 zo bet livet d'al lun 22 a viz Mae e bro-Roazon. Torret eo bet prenester Enselherezh Akademiezh Roazon gant tud eus SAB evit respont da bolitikerezh ar stad a-enep da Ziwan.

REKTORDI ROAZON

Livet eo bet nozvezh an 8 a viz Mezheven mogerioù ar Rektordi "DOUJIT D'AN EMGLEV SINET!". Stanket eo bet e zorioù hag lakaet zo bet peg e-barzh o morailhoù.

"Kement-mañ a vez anavezet gant SAB ROAZON evit skoazellañ ar Stad da vont war-raok evit kudennoù DIWAN."

Anzav a ra STOURM AR BREZHONEG bezañ livet 70 pannel e Bro ar C'hab (Gwaein, Plogon...) ha livadurioù graet ouzher mogerioù an ensellidiez (deskadurezh stad) ha torret gwerennoù e Gwengamp, Sant-Brieg, Lannuon, An Oriant, Roazon. An abeg a zo : emzalc'h an Deskadurezh-Stad a-enep d'hor yezh, a-enep da z-DIWAN...

S.A.B.



STAJOU WAR AN URZHIATAEREZH

35000 Roazon - Da goust titouroù skrivit da : OSCR X2000 Pôle Central - 6 bal ar r'Unanet-35043 Roazon Cedex - pell : 99-35.11.11.



Kentel vrezhonek gant SAB evit daou enseller hag ur polis war mogerioù an ensellid kentañ derez. (Livadurioù graet d'ar sadorn 27 a viz Mae 1989)

D'al Lun 19 a viz Mezheven e vo barnet adarre Herve ar Beg, J.Y.Guern ha Mikael Korle e Gwengamp en abeg d'ar perzh o doa kemeret e manifestadeg Montroulez e-lec'h ma oant o tougen, a-hervez, panneloù-hent.

E miz Genver dija o doa nac'het komz galleg dirak al lez-varn, pa ne felle ket d'ar barner o lezel da gomz o yezh.

Meur a zilenad er vro o deus sinet ar mennad o c'houlenn digant ar barner doujañ da wirioù Mab-Dan ha d'ar frankiz da gomz e brezhoneg.

E-touez an dilennid-se emañ J.P. Jeudi, maer Karaez, Ivon Abiven, maer sant Tegoneg, Fañch Peru, maer Konfort-Berc'hed (JDB), hag ar guzulierien-mañ : Jean Gwegeniad eus Brest Reun Tregar eus Treouergad (o daou izili eus Frankiz Breizh),

Sevel a ra Stourm ar Brezhoneg enep ar varnadenn roet gant ar "Justis" c'hall er prosez graet da Ziwan gant an URSSAF. Adkemer a ra ar Stad c'hall gant an eil dorn an arc'hant a ro gant egile.

Degas a ra Stourm ar Brezhoneg da soñj d'ar Vretoned ne vefe diaester arc'hant ebet

Pierre Morvan eus Pempoull, J.L. ar Meur eus Ploueg ar Mor, Michel François ha Padrig Pellen eus Maoned, Michel Genin eus Roazon, Yves Jardin eus Douarnenez, Joel Gwegan eus an Oriant (holl eus UDB), Jean-Yves Kallag eus Lannuon (KRB), Pascal Baucoup eus Douarnenez (PSU) Renee Konan eus an Oriant, Yves Cochet, Annaig Hache, Joel Morfousse, Beryl Gouaillin eus Roazon (holl gant ar Re C'hlas) Claude le Nizet eus Charbez (PS) ha tud dizalc'h evel Goulc'han Kervella, eil maer e Plouguernef, Yann Gourvez, eil maer, ha J.F. Kervenn kuzulier (ha bet maer) e Landeda, J.Y. an Touz, Pascale Guillou ha M.H. Ar Rouz kuzulierien en Oriant, M.C. Marco e Kavenneq.

Ar re o defe sinet ha n'int ket meneget amañ zo pedet d'hon digareziñ.

A.R.

gant Diwan m'he defe ar Stad dalc'het d'he fromesaoù ha skoazellet Diwan evel ma'z eo dleet.

Stourm ar Brezhoneg a c'hallv an holl Vretoned da enebiñ ouzh an dagadenn nevez-se a-enep hor yezh, evel ma ramp hon-unan.

EUROPA

BREZHONEG

Ar re a gred c'hoazh e vo diskoulmet kudenn ar brezhoneg o tont da lakaat Bro-C'hall da baouez gant he yezhlazherezh a ve bet mat dezho bezañ e Roazon, d'ar Meurzh 9 a viz Mae, o selaou Paddy Carpenter, kargad e Poellgor Brussel, a oa deuet da gomz diwar-benn da zont ar yezhoù en Europa warc'hoazh, hag ar program LINGUA emañ o klask sevel. En-dro dezhañ e oa Enseller Akademiezh 11-ha-Gwilun, an Aonik, ha skolaerien o kelenn yezhoù estren er c'hentañ derez.

ANKOUNAC'HAET AR BREZHONEG...

Sklaer an traoù evit kargad Brussel : ret eo d'an holl Europiz deskiñ meur a yezh, ha seul abretoc'h seul welloc'h. Met lec'h ebet, ar program LINGUA, evit ar brezhoneg : ne oa nemet war-dro ar yezhoù ofisiel -ar re all, evel ma lare Pompidou, n'o deus dazont ebet en Europa moarvat.

...PE KUZHAT ANEZHAÑ ?

Stad a oa en aotrou Nik o tiskouez e vistri o kelenn italianeg, alamaneg, saozneg, yezhoù ofisiel. Ger ebet diwar-benn ar brezhoneg a vez kelenet e kêr Roazon e skolioù-stad ar c'hentañ derez, abaoe tostik da 10 vloaz : ur yezh kuzh moarvat. Met prest e oa da brome-tiñ e vije studiet disoc'hoù al labour graet gant e vistri, a-benn bloaz, p'emañ tud DIWAN ha re an APEEB o c'hortoz e ve embannet disoc'hoù al labour graet gant ar brezhoneg er skol "moarvat e vo aesoc'h hen ober evit ar yezhoù all !".

"Armodiñ e pep lec'h !" eme an aotrou Nik. Ya, pa vez aotre. Evit ar brezhoneg, n'eo ket bet aotreet gantañ sevel ur c'hlas divyezhek nevez e Redon. Petra reoc'h ? E Frañs kozh hiziv, evel en Europa Nevez warc'hoazh, ez eus yezhoù uheloc'h eget re all -en anv ar parded, evel just. Yann Leskildri

DIWAN


MANIFESTIÑ ADARRE



Krog eo Diwan da vanifestiñ adarre evit kaout gwir da vevañ. Ouzhpenn bloaz war-lerc'h an emglev sinet etre ar Stad, ar Rannvro ha Diwan, eo stanket an traoù adarre, abalamour d'ar Stad ha ne zouj d'e c'her. D'an 19 a viz Even e vo un emvod da vezañ dal -c'het etre an dud o deus sinet an emglev. Ministrerezh an Deskadurezh Stad he deus laret ne teufe ket ha n'he deus ket da respont na da bedennoù Diwan na da re ar Rannvro. Diouzh he zu emañ Diwan o klask sachañ evezh dilennidi Breizh evit pouezañ war ar re a zo ar galloud gante e Pariz. Evit se e oa bet aloubet tier ar c'hannaded pe se-

zioù P.S.F. (Strolladour Sozialour Gall) d'ar 17 a viz Mae e pep lec'h e Breizh. D'ar Sadorn 3 a viz Even eo e Mellag e oa en em gavet tud Diwan a-benn klask kejañ ouzh Louis PENNEC, ministr an trevadennoù. Ne oa ket hemañ er gêr, laosket oa bet di ul lizher o c'houlenn digantañ pouezañ war Jospin e genseurt an Deskadurezh Stad. Goude-se e kemeras ar vanifesterien hent aerborzh An Oriant. Miret e voe gante karr nij Pariz da vont e-pad ur c'hard eur bennak. Aze avat, e troas fall an traoù. Skarzhet e voent gant poliserien ha soudarded a daolioù dour hag a daolioù bazh.

G.W.C.



bremañ 7

bremañ 6

FRAÑS HAG ALL...

KATORZUILHET



Em vadañ a raio dileuridi ar seizh stad pinvidikañ ar bed e Pariz d'ar 14 a viz Gouere 1989, pedet gant gouarnamant Bro-C'hall. Daou c'hant vloaz goude un dispac'h en doa, a-hervez lamet o dreist-gwirioù digant ar re binvidik evit reiñ ar galloud da dud vunut an "Trede-Stad", e vo bodet renerien poblou pinvidikañ an douar evit studiañ o c'hudennoù dezho, hag evit klask an doareoù da chom ar re binvidikañ. Kement-se ne blij ket kalz da dud zo a lavar eo Trede-Bed hiziv Trede-Stad dec'h.

Abalamour da impalaerouriezh armerzhel stadoù galloudusañ ar bed eo e varv milionoù a dud gant an naon er broioù paour. Ha petra a vez kinniget dezho ? Un tamm aluzen ur wech an amzer, un tamm skoazell a-berzh ar broioù "diroet". Met tamm diskoulm hollek ebet a c'hellfe lakaat un termen d'an impalaerouriezh, d'ar c'horvoañ, d'an eskemmoù kenwerzhel digempuez...

Evit sevel ouzh ar voda-deg-se hag evit goulen justiz evit poblou korvoet ar bed eo o deus un toullad tud sinet ur galv da vont da vanifestiñ e Pariz d'ar Sadorn 8 a viz Gouere.

BREIZH

KUZUL

Emvod Meur Kuzul Sevenadurel Breizh a oa dalc'h e Roazhon d'an 10 a viz Even. Pev ar den warn-ugent o deus kemeret perzh, en o zouez dileuridi kevredigezhioù : Ar Falz, Bretagne Galise, Skol-Uhel ar Vro, Diwan, Kendalc'h, Skol An Emsav, Kelc'h Sevenadurel Ourvez, Ti Sevenadur Roazhon, Dileuriet e oa kêr an Naoned gant Michel Francois hag hini Brest gant Jean-Marie Garrigou-Lagrange. En anv ar C'huzul Rannvro e oa Louis Le Roux eus Brest hag Adrien Kervella eus Kastell-Paol. Eil prezidant kuzul departamant Liger-Atlantel, Jean Guyon ha daou guzulier all eus an departamant a oa gantañ : Jean Hervy ha Raymond Lebossé. Constant Hubert eus Il-ha-Guilun a echue roll ar guzulierien departamant, ha Paul Hervez a gomze evit ar wech diwezhañ en anv Kuzul Ekonomikel ha Sosial Breizh peopir ne vo mui ezel eus ar c'huzul-se.

Gant ar burev, dindan renerezh Per Denez e oa graet un danevell diwar-benn labour ar C'huzul abaoe 2 vloaz. An dibenn-sizhun labour gant dileuridi an emsav sevenadurel e Sant Malo e miz Gwengolo 87 a zo bet talvoudus evit sikour an emsaverien da gompren penaos ez a en-dro o c'hevredigezhioù, penaos e vezont gwellet en diavaez ha penaos en lec'hiañ evit pouezañ war an endroadur e Breizh. Eno e oa deut ar soñj da sevel ur studiadenñ diwar-benn pouez sosial hag ekonomikel an emsav sevenadurel breizhek.

KULTUREL

Ar studiadenñ-se, savet gant Mark Andro, a zo bet unan eus oberiantizoù pouezañ ar C'huzul gant ar vodadeg diwar-benn an douristezh sevenadurel gant e miz Genver 1988. Met pelloc'h e rankfe bezañ kasat al labour-se evit bezañ abouez.

Meneget eo bet c'hoazh an evezhiadennoù graet da danvez-prezidanted ar Republik a oa liessesur war ar renk e Nevez-Amzer 1988. Respontoù lies-seurt a oa bet gant Lajoinie, Barre, Beregovoy, Chirac, ar re C'hilas.

Bodet e oa bet ivez ar c'hevredigezhioù sevenadurel d'ober kinnigoù arak emvod ispisial ar C'huzul Rannvro diwar-benn politikerezh sevenadurel Breizh d'an 20 a viz Kerzu 1988. Hervez an Ao. Le Roux e rankfe avat al labour-se bezañ kendalc'h et hag e tlefe Kuzul Breizh kaout ur politikerezh sevenadurel gwirion.

E-touez ar c'hinnigoù ez eus ar studiadenñ diwar-benn ar rannvroioù en Europa, o galloudoù, o politikerezhioù sevenadurel hag ur raktres sevel kevredigezhioù skinwel rannvroel e plas FR3. War ar pentoù-se hor bo tro da zont en-dro hep mar, kouz ha war un nevezenti : krouidigezh ur post sekretour-meur gant Jean Gvear deut en-dro e Breizh goude bezañ bet e penn kevredigezh ar Vretedenn divroet e-pad pell amzer.

KELENN

DEUG E BREST

Ne ouesser ket... hag en e talloev an DEUG... evit Skol Veur Roazon hepken pe, kenkoulz all evit Skol Veur Brest !" a skriv Armañs Keravel e niverenn miz Ebrel "BRUD NEVEZ".

Betek-hen eo aes ar respont, pa ouzer ne oa bet morse goullenet tamm DEUG ebet betek-hen gant Skol Veur Brest. Ma 'z eus bet graet abaoe ur pennad e oa hep nemeur a drouz. Ma ne oa ket stank studierien Vrest e manifestadegoù Gwened ha Sant Brieg e oa splannoc'h c'hoazh ezvezañ o c'helennerien Skol Veur. Ne oa ket souezhus pa oa anavet enebiezh lod anezho ouzh an aotreegezh da gentañ, ouzh ar C'hapes da c'houde (souezhusoc'h marteze, evit ar re n'o anavont ket, e oa o gwelout e penn ar juri CAPES, 2 vloaz goude ma vo savet !). Ha disheñvel e vefe evit an DEUG ?

Ne vir ket se ouzh Armañs Keravel da lavarout 'e oa bet ret da Skol Veur Vrest, da vev ha da gwal-kêr kêr-Vrest, da silemñdi Breizh Izel (sic), da "Engleo Breizh", stoum hep dihanñ e-pad teir pe peder sizhun evit ma vefe roet da Skol Veur Vrest hec'h aotreegezh i-

vez. Ne lavar ket Keravel ne oa ket ar memes aotreegezh (unan daoubennek e Brest) a oa goullenet ha ne lavar ket penaos e voe "stourmet". Un dra zo sur avat : ma teu an DEUG brezhoneg bennak (daoubennek ?) da Vrest ne vo ket ken poanlus na ken trouzus he Skol Veur na stourm an Emsav evit un DEUG brezhoneg, ur stourm n'he deus ket kemeret perzh enañ. Perak 'ta?

Evit "dilennidi Breizh Izel" (pe dilennidi zo eus Breizh Izel ?) ne voent ket niverusoc'h eget kelennerien Skol Veur Vrest ar stourm evit an DEUG nemet ur wech : e Sant Brieg, pa voe dalc'het un eurvezh-pad an aotrou Didier Chouat (Breizh-Uhelad, kannad bro Loudieg) gant ar vanifesterien. Ar re all a oa kuzhet mat !

Ma vez aes tapout an DEUG gant Skol Veur Vrest e vefe di-zereat en em c'houlen penak ne oa ket bet goulet abretoc'h : un araokadenn e vo ha vad a ray d'hon yezh. Ne chomo nemet da hentiñ e vo ken aes all ar stourm evit ar brezhoneg en amzer da zont.

Herve Tangi.

DEUT MAT E VIOC'H ATAV E TI AR BREZHONEG HA PA NE VEFE MUI EUS PARIS



BEP DAOU VIZ LENNIT
AL LANV
59, hent
KERDRONIOU VIKAN
28000 kemper
KOUMANANT BLOAZ 100 1
SKOAZELL : adalek 150 lur.

al liamm A
Koumanant bloaz 120 lur
(studierien, soudarded ha tud dilabour : 100 lur)
Skrivañ da : AL LIAMM
16, straed des Fours à Chaux - 35400-St Malo-

Evit gouzout hiroc'h : CEDETIM 14, rue de Nanteuil 75015 PARIS

BERR HA BERR

KENDALC'H UGB

E gwened d'an 3 a viz Mezhven, e oa Kendalc'h bloaz Unvaniezh ar Gelennerien Brezhoneg, a vod bremañ ouzhpenn 170 kelenner eus an deskadurezh-stad pe brevez dreist-holl, eus Diwan ivez hag eus kevredigezhioù all c'hoazh evel Skol Ober, pe kelennerien brezhoneg bro-Bariz.

Studiet eo bet al labour graet e-pad ar bloaz ha dreist-holl ar stourm evit an DEUG.

AN DEUG

Goulnenn groñs a ra an Unvaniezh digant ar ministrerezh embann fraezh e vo reet ur gwir DEUG brezhoneg a-benn an 13 a viz Mezhven, goude ar vodadeg a vo bet e Pariz hag a zleo di-vizout penaos e vo kompennet an DEUG Brezhoneg hag an hini Euskareg, rak ma ne vefe ket kompennet neuze e c'halvo an Unvaniezh da vanifestiñ.

KRESK NIVER AR SKOLIDI

Klemm a ra an Unvaniezh en abeg da enebiezh ar Velestradurezh a nac'h digeriñ klasoù divyezhek neuze e Redon, an Alre, ar Gemene, er c'hentañ derez, hag a glask leneñ bep a 1/2 bost brezhoneg e Roazon, an Alre ha Brest ha Perroz pa'z eo kresket niver ar skolidi er skolajoù ha liseoù, eus 3062 da 3553, da lavarout eo 491 skolidiad ouzhpenn enur ober ur bloaz (+ 16 %).

Goulnenn a ra U.G.B. ma vo laketa 5 post er C'HAPES brezhonek da vloaz ha ma vo kresket niver ar "servijoù" (dambostoù) brezhonek zo dija evit gellout bastañ d'an ezhomm.

Goulnenn a ra ivez digant ar ministrerezh kregiñ da zivizout ganti diwar-benn dazont ar Brezhoneg en deskadurezh.

UGB TI AR REKTOR

D'ar Gwener 9 a viz Mezhven eo bet degemeret UGB er Rektordi evel bep bloaz. Ar wech kentañ avat e oa d'ar Rektor nevez kejañ ganti, setu n'en deus ket gallet respont nemeur d'ar goulennoù graet outañ : diskleriet en deus e vefe kuzulier war gudennoù ar Brezhoneg gant an Aotrou Cormerais, eil-enseller akademiezh e Roazon.

LEZ-VARN AR VELESTRADUREZH

D'ar Yaou 8 a viz Mezhven e teue dirak Lez-varn Melestradurezh Roazon ur rekad savet e 1985 (4 bloaz zo) gant Yann Bouessel du Bourg, kelenner war e leze, ouzh Ministrerezh an Deskadurezh ma felle ket dezhañ anavezout e aotreegezh vrezhonek (bet gantañ e 1982) aotreegezh-kelenn hag a zalc'he d'e baeañ evel M.A.I.II pa oa da vezañ paet evel M.A.I.I. N'eo ket ur gwir aotre-kelenn an aotreegezh vrezhonek, a arguzenn ar Ministrerezh ! Sed a vo kavet souezhus moarvat gant kelennerien ha studierien ar Skol-Veur !

Hervez Komiserer ar gouar-namant eo soutilloc'h an traoù : n'eus ket a aotreegezh-kelenn hep CAPEs, da larout eo ne oa ket a aotreegezh-kelenn brezhoneg a-raok 1985, bloavezh krouidigezh ar C'HAPES. Gwir en de-fe eta Yann Bouessel du Bourg da vezañ paet evel M.A.I.II abaoe krouidigezh ar C'HAPES hepken !

Barnedigezh al Lez a vo embannet a-benn an 22 a viz Mezhven.

EMGLEV HELSINKI

Savet ez eus bet e Bro-C'hall ur "C'huzul diwall emglev Helsinki", en e benn an aotrou Bernard Stasi (CDS) a skrive d'un emsaver : "Direizh a-grem e kavfen e ve aotreet ur c'heodedour gall da gomp brezhoneg gant ul lez-varn c'hal".

Difenn gwirioù Mab-Den a ray an aotrou-se, evit-doare. Difennet mat e vint gantañ, hervez ar c'hiz c'hal evel just.

Roland Garros trec'h war Yakari

Disul 4 a viz Mezhven, e-vel a oa c'hoarvezet dija bloaz zo, n'eus ket bet tu da arvestiñ ouz an eurvezh vrezhonek nemet a skinwel a zo ganimp d'an eur voas, abalanour da skignadenn diduamant muiañ-karet mondianed kêr Bariz a vez neuze o vouzañ e tennis a Roland Garros. Ur chadenn "rannvroel" eo FR3, a lavarar dimp? Chadennet eo FR3 Brezhiz ouzh Paris, ya ha dont a ra ar Vretoned pell war-lerc'h an tennis -hag ar vrezhonegerien pelloc'h c'hoazh- e preder renerien ar gompagnunezh-stad-se, pa oa bet skignet "Chadenn ar Vro" da 7e. diouzh ar mintin.

Pet kevredigezh eus an Emsav (ha pet lemm) he deus klemmet neuze ? Hini ebet betek hen, dimp da c'houzout. Ya, mar-teze ne serjio ket da galz tra met sur e c'hallomp bezañ e vo graet troioù lous all a-enep d'hon yezh ma ne reomp tra. Bugale Diwan, na laosket ket Roland Garros bras drouk d'ober vil da Yakari bihan koant.

Alan Riou

KILAQUINN
Kuzulier diwar-benn
brezhoneg gwal

36-15
TC/KELA

- Kelenner ar vro
- Goulnere, Fentol nos ...
- Levrioù nevez embannet
- Skol Uhel Ar Vro
- C'Hoarioù

BREIZH-KEMBRE

Klask a ra ar gevredigezh BREIZH-KEMBRE kanerion ha sonerion a zeu brezhoneg gante evit kemer perzh er bodad breizhat a yad da Gembre, da Eisteddfod Llanrwst, e sizhunvezh kentañ miz Eost.

BERR HA BERR

BREZHONEG e LIBERTE

Kaoz a zo da sevel ur bajenn vrezhek miziek e-barzh "La Liberté du Morbihan", a embann dija ur pennad brezhonek sizhuniek savet gant Daniel an Doujet. Ar bajennad kentañ a vefe embannet d'an 8 a viz Gouere : kavet e vo enni pennadoù e galleg, e brezhoneg (hag e gwenedeg), gerioù-kroaz ha lizhiri lennerien.

Gortoz a reer c'hoazh brasañ kazetenn bemeziek hor bro da ober kemend-all. M.K.

EMBANNADURIOU

"KELEIER AR VRO" niverenn 5, miz mae 1989 - Kannadig ar gevredigezh oberiant Emglev Bro an Oriant en deus graet renabl an holl skolioù a ginnig Brezhoneg e bro an Oriant. Mont a ra war-raok an traoù e klasoù divyezhek ar skolioù stad, e Pondi ha Lanester, hag e skol Diwan, staliet en ur skol nevez-flamm ha digoret ganti ar c'hentañ derez.

KELEIER AR VRO - 5, ur Dr Lettry 56100 AN ORIENT - 97.83.66.26 - Koumanant bloaz : 40 lur.

STAJ

Ur staj brezhonek a vo aozet gant ar gevredigezh Minihini Levenez etre an 3 hag an 8 a viz Gouere 1989. Digor eo d'an deraouidi koulz hag ar re o deus bet un tañva eus ar brezhoneg dija ; d'ar re vras koulz ha d'ar vugale.

Priz ar staj (predoù ha lojeiz) : 600 lur evit ar re vras ha 300 lur evit ar vugale.

Titouroù : Minihini Levenez presbital Trelevenez 29220 - Landerne - Pellg 98-85.15.66.

YEC'HER DROITIS D'AL HOMME

CHIEF Gwirioù Mab-Den Roazon

RENES ROAZON

27 MAI

LEZ-VARN MELESTRADUREZH ROAZON

27 MAI

LEZ-VARN MELESTRADUREZH ROAZON

27 MAI

SIMONE E BREIZH

Bet e oa Mikael Konk, en anv familhoù DIWAN, o c'houlenn digant an Itron e penn listenn ar c'hreiz petra soñje-hi eus lec'h ar "yezhoù bihan" en Europa. "In europeanaez a greden e oa anezhi, ur Barizianez ne oa ken", emezañ war R(F)80. Pa soñjer e vo tud drouk a-walc'h ganti evit klask he c'has en harlu da Strassburg



DESKADUREZH

Diwar an 9 den o doa laketa o anv evit ar C'HAPES brezhonek er bloaz-mañ ne oa bet nemet 6 o vont da dremen al lodenn dre skrid da Roazon, ha 4 anezho goude o vont da Bariz da dremen al lodenn dre gonz. Gant Padrig an Habask eo aet ar post nemetañ a oa er C'Hapes er bloaz-mañ. O vezañ ma chomfe da gelenn en deskadurezh prevez e c'hortozfed ar Ministrerezh da grouñ ur post en deskadurezh-stad memes tra.

PREZEGENN


Ur brezegenn diwar-benn AR C'HELENN E-BARZH DIWAN a vo graet e ROAZON, d'ar Yaou 15 a viz Mezhven gant Herve Kerrain, rener ar c'helelenn e Diwan, e Ti Tachenn Veurz (ti ar c'hevredigezhioù) da 8e30 noz. Lakaet eo bet war roll prezegennoù ha skritell an M.C.M. ha kaset da ouzhpenn 800 kevredigezh eus bro-Roazon



Levrioù, Pladennoù, Arz Keltiek

Bemez Boulc'h - PAC ball Clémenceau - 29200 BREST - Pgz : 98 44 05 38

GOUEL AN ERMINIG



E 1381 e voe krouet Urzh an Erminig gant an Dug Yann IV ; digor e oa an den da gement den dellezek eus Breizh: denjentil pe get, marc'heg pe blac'h.

E 1972 e kinnigas ar Senedour Georges Lombard, pa gemeras lec'h ar Prezidant René Pleven e penn ar CELIB, e vefe adkrouet ar seurt medalenn-se evitañ. Da Jean Mevellec, Prezidant Kamb Labour-douar Penn-ar-Bed, ha Kamb Rannvroel al Labour-douar, ha da Gabriele Pescatore, kenkrouer ar "Conférence des Régions Périphériques Maritimes", e voe roet an dro-gouzoug-se goude-se.

E 1988 ec'h en em glevas ar CELIB ha Skol-Uhel ar Vro e vit adkregiñ gant al lid-se, ha roet e voe an Erminig da Vefa de Bellaing, Pierre Roland Giot, Polig Montjarret, Henri Queffelec.

E 1989 ez eus bet divizet goulenñ gant Pierre Toulhoat krouiñ un dro-gouzoug nevez en arc'hant.

Roet eo bet an Erminig d'an 2 a viz Mezheven e Kastell an Duked en Naoned, evit al labour o deus graet evit Breizh hag he sevenadur, da :

-v/Maïvon Jaouen-Kemere, stourmer evit ar brezhoneg ha sevenadur Breizh abaoe ouzhpenn 50 vloaz, stourmer evit difenn an natur hag an endro dreist-holl en he bro, Bro Fouen.

-b/Per Denez, skrivagner brezhonek ha yezhoniour, kelenner war ar C'heltieg e Skol-Veur Roazhon, Prezidant Kuzul Sevenadurel Breizh, Prezidant Kuzul Skiantel Skol-Uhel ar Vro

-Louis Lichou, Renner ken-seurterez labourerien Douar

Penn-ar-Bed hag Aodoù-an-Hanternoz, Renner Kef Kevredel ar Crédit Mutuel de Bretagne, ha kuzulier war ar c'henwerzh hag an ermaeziañ.

-v/Bernard de Parades, en deus graet war-dro ar sevenadur bobl e-pad ouzhpenn 40 vloaz, produer e Radio-Breizh, animatour gouelioù Kerne ha festivoù Lokronan.

Aozet e oa bet al lid-se gant Skol-Uhel ar Vro gant skoa-zell kêr an Naoned, Kastell an Duked, hag an A.T.R.

Komzet o deus ar pevar den dibabet diwar-benn personelezh Breizh, ar stourm evit he difenn, ar stourm evit ar Brezhoneg, plas Breizh en Europa da zont.

Goude-se e voe kanet Bro Gozh va Zadoù gant an holl gouviidi ha Lez-kanañ Cantorian Motret eus Bro-Gembre. ■

ADKOUMANANTIT 150 lur ar bloaz DA V- bremañ

KENDALC'H DEROU HA KRESKIDIGEZH

Un emvod etrekeltiek kentañ a zo bet dalc'het e Abergavenny, e Bro-Gembre e 1838. Abaoe ez eus bet meur a hini all, da skouer e Sant Brieg (1867), Dulenn (1901), E-dimbourg (1907), Glasgow (1921) hag all...

Paouezet e voe gant an darempredoù etrekeltiek e-pad ar eil brezel bed, kent adkregiñ e Dulenn, e 1947, hag e Bro Gembre e 1948, war-lerc'h an Eisteddfodd. Da-geñver emvod Kendalc'h Bangor (Bro-Gembre 1949) eo e voe diazezet reoliadurioù nevez ar c'hendalc'h, ar re hag a vez graet atav ganto hiziv an deiz gant ar "C'hendalc'h Keltiek Etrevroadel".


Abaoe diazezoù Truro ez eus bet krouet e pep hini eus ar c'hwec'h bro gelt, ur skourr eus ar C'Hendalc'h. E mod-se e vez dalc'het kendalc'hioù bloavezhiek e pep bro, pep hini d'he zro. Er bloaz-mañ ez eo tro ar Vreizhiz da zegemer ar gendalc'hidi, e Lesneven an hini e vo evit pleustriñ war an tem-mañ:

Europa 1992 hag ar broiou keltiek

Tem kendalc'h Landreger, e 1962, e oa : "Ar broiou keltiek hag ar c'henvarc'had". Abaoe ez eus bet kendalc'hioù all e Breizh : e Foujera e 1968, e

GWELET HA KLEVEET E VO

"PENNGOLO" ur strollad sonerezh folk eus Douarnenez, Jil Servat Ar c'hoarezed L'Hour, kanerezed festoù-noz eus Bro-Leon, "Kane-rïen Langazel" ur strollad kanerien ha-diskan eus korn-bro Lesneven ha Michel Boedeg, soner ograoù, ha "Golvanig" ur strollad sonerezh rock eus sant Nazer, Strobineil ur strollad sonerezh folk eus sant Brieg, Andrea ar Gouilh, kanerez gwerzioù ha sonioù (re ar Barzhaz Breizh da skouer), "Gŵr Godre'r garth" ul laz-kanañ



Palioù ar C'hendalc'h Keltiek a zo : derc'hel d'ar sevenadur ha d'ar yezhoù keltiek, harpañ an eskemmoù hag ar c'henlabour etre aozadurioù ar broiou keltiek.

E Truro, e Kerne-Veur, e 1950, eo e voe dalc'het ar "C'hendalc'h Keltiek Etrevroadel" kentañ. Disheñvel-bras eo kendalc'hioù ar mare-mañ diouzh emvodoù gouiziek derou ar c'hantved-mañ. Ne vez ket komzet kalz ken eus hendraouriezh na yezhouriezh met kentoc'h eus stad hor yezhoù ha sevenadurioù an amzer-vremañ ha da zont, o flas er vuhez foran, er skol, er skingomz hag er skinwel.

Naoned e 1974 (diwar-benn gwirioù sevenadurel ar broadoù hep stad), hag e Lannuon e 1981.

Ar yezhoù a vez graet ganto e-pad ar c'hendalc'hioù a zo reoù ar vro degemerer hag ar saozneg. Er bloaz-mañ e vo graet gant ar Brezhoneg, ar saozneg, hag ar galleg evit kas al labourioù en-dro. Bez. 'e vo ur servij troidigezh. ■

KENDALC'H KELTIEK ETREROADEL
Sekretour : Loik Chapel - 5, ru Berlioz 29245 Plourin-Montroulez - Evit kaout titouroù pe resisadurioù diwar-benn mont en dro ar C'hendalc'h pe traoù all

eus korn-bro Pontypridd, "Gwa-rydryon" ur strollad muzisianed ha kanerien, dañserien, aktourien, Neil Kernno-Plummer, kaner ha Jane Kneebone, kanerez ha sonerezh gitar (kan a ra e Kerne-veur), holl ar re-mañ a zo neveureg), holl ar re-mañ a zo eus KERNE-VEUR. Ha Tony Kearney kaner ha gouezeleger (18 vl.), "Gleus" ur strollad folk gouezelek, eus BRO-SKOS. Meir Llyod eus Caerfyrddin (Bro-GEM-BRE), ar gêr gwelet gant Lesneven. Senñ a ra an delenn, brudet eo en he bro evit ur mod kanañ ha n'eus netra par dezhañ arvet "penillion" pe "Cerdodant". ■

TAOLIOU IMOR

GREGOIRE HA TRAOU ALL...

Petra c'hoantae harluidi ar Bobl Dibabet er bloaz-vezhioù 1789 ? Bevañ e peoc'h, kaout an hevelep gwirioù hag annezidi ar broioù ma vevent enno. Kement-se a zo bet roet dezho er Frañs gant an Dispac'h hag an abad Grégoire (p.13, "Lid.Enor d'an abad Grégoire"). Dezho ha d'an holl Frañsizien e voe roet gwirioù hinienel ha gwirioù keodedel.

Padal, ne voe ket kaoz a reiñ gwirioù d'ar c'hunniezhioù ha d'ar pobloù, hag enebet-krenn e oa an abad Grégoire ouzh Kement tra a c'hellfe laakaat unvaniezh ar Frañs hag an Dispac'h en arvar.

A-walc'h eo evit ma ne vefe ket meulet an abad Grégoire gant an emsaverien, atav prim o vezañ feuket hag o laakaat o brouez war baper hep en em soñjal pelloc'h. A-walc'h eo ivez evit ma skopfer war ar gwirioù hinienel ? Keuz gant ar Renadur Kozh, ha "Frankiz Breizh" (hag ar Vretoned ?), kaset d'an traoñ gant Klub ar Vretoned (p.6, "Dispac'h 1789, Liderezh").

Pep hini 'zo du pe wenn, pe gentoc'h, gwenn-ha-du pe glas-gwenn-ruz (ha bezañ ruz



hepken, hervez meur a bennad en niverenn 92-mañ, eo ar pep gwa-

shañ). An abad Grégoire diouzh un tu. Roparz Hemon, glan, diouzh an tu all. Hag ivez ar re wenn-ha-du a lavaras "Frañs' s difficulty ist Breizh's opportunity", hag a lavaras ivez "Ein Reich, ein Volk, eine Sprache" (gant ma vefe ar brezhoneg), hag ivez "Ein Führer" ?

Bretoned 'zo mat dezho tagañ ivez liz Katolik Bro Spagn pa vez an hevelep liz o ren e Breizh ha p'o deus lakaet da sant e Gwened ur C'hatalanad (e ya !) en doa savet progromoù en e vro. Gwir eo, pa lemer pelloc'h (p.17) ur pennad gant Beleien Breizh hag Englev an Tiegezhioù e vez displeget deomp e oa bet difennet a-viskoazh -hervez- gwirioù ar Vretoned gant an liz Katolik, ha gwirioù Mab-Den dre vras (goulennt gant Touvier).

Pegen tagnous ar pennad-mañ ! Tagnousted ouzh tagnousted. Untuegezh ouzh untuegezh. Petra 'c'hoarvez pa weler tud o skrivañ diwar-benn an istor pa n'int ket istorourien, ha pa savont, gant ul lagad dall -hag hep meizout zoken- pennadoù propaganda e-lec'h kazetennerzh ?

Anshel Babel

ENOR D'AN ERMINIGOÙ

ENOR DA YANN IV, PLEVEN...

Enor d'ar Re Dibabet ar bloaz-mañ evit dougen koulter an Erminig -a-raok bezañ kaset d'ar retred pe d'ar verad ? - hag o deus labourer mat evit Breizh, personelezh Breizh, sevenadur Breizh, bankoù ha peizanted Breizh, gouelioù Breizh, yezh Breizh. Hag a zo DELLEZEK, setu ar ger.

Dellezek da gaout ur goulier, ul lid, ur banne da lipat ha tud da reiñ mel dezho gant al loa-bod. Hag evit se o deus labourer ?

Piv en deus gwir da lavarout piv a zo dellezek, piv en deus labourer mat a-walc'h, e-keñver-mañ-keñver, hervez an doare-mañ-doare da soñjal diwar-benn Breizh ? Piv en deus gwir ? Ar C'huzul-Rannvro ? Me-toù intelektualer ur geto sevenadurel ? Koulterien ha micherourien ar Vro ? Ha piv en deus gwir da gaout an Erminig ? Prezidanted ur C'huzul pe ur C'hef bennak ? Skrivagnerien ? Kelennerien ? Doust hag e c'hell -fe ur stourmer dianav bennak, ur sindikalour o tifenn labourerien Breizh, kaout un Erminig ivez ? Postromant eo ret bezañ

tud dereatoc'h, sevenaet, propwarno, evel evit al "Légion d'Honneur" ?

Padal, piv a bae an notenn e fin ar gouel ?

Ha petra a zegas ? Pe-seurt brud, peseurt heklever, pesourer ar boblañs, peseurt anaoudegezh-vat evit ar Re Erminiget a-berzh Pobl Breizh dre vras ? ...

Ma ! Petra ne rafer ket evit klask ober kevezerezh d'ar "Bicentenaire" !

Yann Menozek

DIWAN ROAZON

GWELADENN



Bremañ n'ho peus gallet gwelout stad an traoù, e c'hellit en em c'houlenn : perak 'ta salioù ken kozh ma bae ar gerent tailhoù evel an holl dud ? Ne skoazell ket an ti-ker evit paeañ ar feurm, ar c'hargoù, gopr ar skolaerez. Padal e vez, goulennt groñs gant ar gerent, hag ivez ar cheñjamant salioù. An holl skolioù-se ne vefent ket un doare da glask lazhañ ar Brezhoneg, ur wech ouzhpenn ? Koulskoude ez eo aesoc'h da vugale divyezhek ez-vihanik deskiñ yezhoù all goude-se.

Ma ! ma n'oc'h ket kendre -c'het, kit d'ober un dro duhont. Ha bremañ, ma anavezit un tamgig stad skol Diwan Roazon, grit bruderezh, sur ne raio ket droug !"

Anne-Louise Delahaye

KINNIGOÙ LABOUR

Emañ AN GALED (kreizenn Treglonou) o klask daou zen da sikour evit mont-en-dro he c'hreizenn e-pad an Hañv (miz Gouere-Miz Eost). Al labour-se vefe reiñ skoazell da fardañ ar predoù, d'ar c'hel ar greizenn a-ratre (mena, skao-taj...) ha servij an dud diouzh taol.

Ret eo gouzout brezhoneg (pe bezañ gouest d'e gompen da vihanañ). An dud a vefe dennet gant ur seurt labour a rank pellgomz da :

Erwann DENEZ 98-04.07.04. (lojet, maget, ha gopr et vo).

Emañ DIWAN BREIZH o klask ur rener, brezhoneger, ha Live BAC-3 gantañ, barre-gezh war ar merañ a vez goulen- net, ha skiant-prenet war ul labour heñvel a vefe gwelloc'h.

Skrivañ da z-Diwan e Treglonou (29214 Lanniliz), pe evit kaout muioc'h a ziskleriadurioù diwar-benn ar pos-mañ: pellgomz da Yvon Raoul - rener Diwan - Pellgomz : 98.04.05.42.

Eniverenn 14 boulevard Gwi-treg e Roazon e kavoc'h un ti bihan e mein ; ne-tra souezhus : Skol Diwan eo, ar skol vrezhonek. Na glaskit eo ar potailh : o vezañ ma'z eo re dost an ti ouzh an hent, gwall sot e vefe koll lod eus an 9 skoliad a zo e-barzh.

Evit mont 'barzh, pouezit war an nozelenn, seniñ 'ra, pegen modern ! Degemeret e voc'h gant ur mousc'hoarzh bras ; mont a raer e-barzh dre ar gegin, hag a zo sal-debrin ar vugale ivez ; pa weler se e vezer tost evurus o vezañ skoliadez e Sant Visant.

N'eus nemet tri fezh er skol Diwan : ar gegin-ar sal-debrin, ur sal-c'hoari evit ar re vihan hag ur "sal-kentelioù" evit ar re vrasoc'h. Displegañ a ra ar skolaerez (he micher eo) eo ar vugale etre 2 ha 5 bloaz. Taolit evezh ouzh ar planchod difoñset mat kompennet gant kartoñs ; dañjer ebet evit ar vugale, evit ar botoù seuliou uhel ne lavaran ket. Taolit evezh ivez ouzh stalidiadur an tredan, hag a vez kompennet er mare-mañ, evit ma klotfe gant ar reolennoù a surentez. Hervez ar vicherourien n'eo ket dañjerus stad ar stalidiadur, gant ma ne glasker ket al lugell a-hed an devezh...

N'eo ket kompennet dispar diabarzh an ti, met, o vezañ ma

vez feurmet an ti, ne c'heller ket peurc'henn anezhañ. Bez 'zo ur sal-dour ha privezioù memestra, met n'int ket bet savet evit bugale vihan. An diavaez a zo ken manrus all : trist eo ar porzhioù e betoñs, met plijusoc'h int, e-pad ar goañv, eget ur porzh leun a fank hag hep gouder evel m'eo duhont.

Treuzveañ a ra ar skol gant yalc'hadoù treutik (44.371 lur e 1988) ha gant profoù a vez atav degemeret mat (33.295 lur e 1988). Padal e koust ker ar feurm, ar c'hargoù, gopr ar skolaerez hag ar frejoù pedagogel : 122.114 lur evit ar bloavezh. Hag ar c'hentelioù ne goustont netra. Evit aesaat an traoù, e vez ar gerent o kemer perzh : pep familh a ra war-dro predoù an holl vugale e-pad ur sizhunvezh, pep hini d'he vro. E Brezhoneg e vez graet an holl gentelioù gant ur skolaerez hag un d/TUCez ; houmañ a c'hell evel-se kaout ur stummadur hag ur post da vat he do a-benn nebeut.

Ouzhpenn ar pezh a vez graet diouzh boaz er skol-vamm, kanaouennoù, c'hoarioù, tresadennoù, kousked, gwellaat ar yezh ha matematik hervez oad ar vugale, e vez graet traoù all e dibenn ar mintivezh : diapioù d'al lun, labour-dorn d'ar meurzh, keginerezh pe bourmenadenn d'ar yaou, sportoù d'ar gwener. Ar gerent eo a ra war-dro an dezougerezh, evel ma c'hellont.

FILMOU KEMBRE

Abaoc'h penn kentañ ar bloavezh-mañ eo daou film eus Bro Gembre an eus bet tro da welet. Hep chom re bell da skrivañ diwar o fenn e kav din memestra e talvez ar boan ober anv anezho hag estreget d'o me-negi. E pep keñver ez alian kement den troet gant Breizh da vont d'o gwelad ma'n deus tro.

RHITH Y LLOER

Ne vo ket ken resis va skridvarnadenn hag hini Youenn Jardin (er "Pleuple Breton" Nv. 301, paj.24). Da c'houzout resisoc'h e c'hellloc'h atav mont d'he lenn.

Dre vras kenañ eo istor ur gembredrez yaouank a ya da Londrez da vevañ. Da vare ur veajig e Paris e ra anaozdegezh gant ur broadelour breton. Nemet e teu an eil brezel bed. Ar plac'h a zistro da Vro Gembre. Ar paotr a labour evit an Alamanded ha dre se eo kondaonet p'eo "dieubet" ar vro. Gant sikour ar Gembredrez e c'hell te-c'h et, da Vro Gembre da gentañ, da lwerzhon war-lerc'h. Met pa gompren ar plac'h n'eo ket karrantez ar paotr evit he hini ez echu o zamm istor. Kalz muioc'h a draoù a zo e-barzh ar film ivez evel just.

Interest pennañ ar film-mañ evit Bretoned eo e laka war ar skramm un tu eus hon istor hag a gaver gwelloc'h d'erc'hel kuzh peurliesañ, ken gwiridig m'eo da galz Bretoned an oad e vefe meneget, da lavaret eo em-zalc'h broadelourien 'zo e-keñver alouberezh ha bezañ an Alamanded e-pad ar brezel. Evit tud va oad eo diaes a-walc'h intent penaos e c'heller chom ken lent. Ne vern petra soñjan diwar-benn ar choaz graet gant lod, sur eo ne ra poan spered ebet din e vefe degaset ar goaz diwar o fenn. Met sklaer eo e talc'h al lenti-digezh mañ e meur a zen. Ne welan ket servijoù abadennoù brezhonek an tele e Roazon oc'h ober ur film war ar memes danvez, 'louezan ket perak.



An eil interest, kalz brasoc'h va hini evitañ, eo hini ar choaz yezhoù er film. Abaoe bloavezhioù ha bloavezhioù on skuitzh ha tremen skuitzh gant ar filmerezh doare gall-amerikan (ur c'hemm a welit etre an daou ? Estreget dre ar yezh, met peogwir eo ral gwelet ar filmoù amerikan e saozneg...) war ar poent-mañ. Penaos, a soñjan, e c'hell tud ken tik gant bravenerezh (dilhad, endro...) bezañ ken dichek ha difoutre e keñver yezhoù ?

Aze da vihanañ, er film-mañ eo bet graet ar choaz dre a blijfe din e vefe graet alliesoc'h, hag estreget ganeomp

AN DUCHENN HUD
BECHEREL

KAFEDI-TI KRAMPUEZH
abadennoù-noz
A-BEP SEURT

Kelted. Ur film liesyezhek eo. Seul virvidikoc'h din e welet ma 'z eo ar beder yezh a glevet warnañ dres ar re a gozean an aesañ va-unan. Kalz realistoc'h an traoù evelse, evel just, ha dre se un tammig brav a "brakadenn", kea.

Evelato, evit ur wech, n'eo ket gant ar Brezhoneg eo 'm eus bet tro da vezañ feuket en ur film. Ar c'hembraeg (dav gouzout memestra e klever, ez yezhel, tro, lakaomp 60% a gembraeg, 30% a saozneg, ha neuze 6% a c'hallieg ha 4% a vrezhoneg, sañset ez eus alamaneg ivez, met 'm eus ket kle- vet !) hag ar saozneg a zo, e kement ha ma c'hellan barn, di-rebech. Forzh penaos eo graet ar film gant BBC Cymru. Ur film kembreat eo e pep keñver e gwirionez, ha savbeton ar plac'h, he flanedenn dezhi eo a zis-kouezer deomp. Ar brezhoneg eta -evit ur wech- tost digudenn (da vihanañ gant tri eus ar pe- var pe bemp aktour laketa da gozeal anezhañ forzhig). Met ar galleg ! Jezuz va Doue ! An- fin n'eo ket din da vont da zi- fenn ar yezh-se, kea. Met ke- ment hag ober labour lipet... koulskoude n'eo ket an aktou- rien a goze galleg mat a vank er bed, eo ? Ar re nemeto a zeue galleg reizh ganto 'oa ar vrezhonegerien ! Dipitus.

A-hend-all e rankan ansav em eus kavet ar film damc'hraet -e ya !- Evit tud evelodn, o deus un interest bras enañ evit abegoù all, mat tre (ha c'hoazh...). Met tud na reont va na gant Breizh na gant Bro Gembre... ? Filmerezh graet re vuan em eus kavet ez oa. Seul zipitusoc'h m'eo ur film hir. Ha n'on ket bet fromet ken don- se, 'rankan lavaret, gant doare c'hoari ar plac'h pennañ. Kas- sus memestra. Ur film pinvidik e ranvez, menozioù mat enañ, ur steuñven savet aketus. Met ma vefe kriz e lavarfen krak ha berr eo da ober adarre ! Evelato, pa vezer diwar re nebeut, evel ma 'z omp ni, kelted... Hep keuz memestra, da vezañ e we- let, hep ur wilc'hadennig enoc'h. Met estreget evit tud entanet dija e ranker ober filmoù evel se.

AR STRAKEREZ

LLIWIAU


Ma c'heller kavout abeg e "Rhith y Lloer" evit ar pen- nadoù "galleg" a zo e-barzh a- mañ 'vat... rebech ebet d'ober a-fed yezh e Bro-Gembre gembra- ek e c'hoarvez an istor penn da benn. E Kembraeg dreist holl ez eo, ha Kembraeg mat, evel just, n'eo ket brizhkembraek. Gant tannoù saozneg e-barzh, pa oa reizh, hervez an istor, hini ar film hag an istor dre vras, e vefe.

Disaezet eo ar film-mañ, unan hir eo ivez, war c'hoari ar flash-back war zigarez li- vioù disheñvel boullou bilhard da vare ur c'hoariadeg bilhard. Enañ daou zen o c'hoari an eil enep egile, met estreget dre ar bilhard rak helebini 'zo ivez en o buhez a-hend-all. A bep eil eo frammet ar film penn da benn gant pennadoù eus ar c'ho- riadeg ha neuze, diwar liv boull pe voull, e loc'h ur pen- nad flash-back a ro deomp da intent istor unan eus ar c'ho- rierien-se.

Mat kenañ em eus kavet ar film e pep keñver. Produet eo bet gant BBC (Cymru ivez, ar pezh a ziskouez ez eus eno, ha dre vras e Bro Gembre, tud a oar ober labour lipet e pep mod. Speredek eo, frammet resis hag hep stranerzh, hep netra a zisont (da vihanañ n'em eus ket gwelet). Lavaret 'z eus bet din n'eo ket ar c'hoariadeg bi- lhard kentañ a zo filmet en ur film kembraek. Posubl tre, met, me 'garfe gouzout peseurt obe- vanz arzel n'eo ket diazezet war deilz meur a oberenn arzel savet en he raok, e na pet keñ- ver ? Na pet gwech e c'hoarvez ganeomp holl, sur awal'h, be- zañ banet gant tra pe dra a zo nevez deomp, a romp istin d'ar c'hrouer evit bezañ e ginniget deomp, evit ar wech kentañ de- omp, ha padal...

Ne c'hellan hetit nemet da welet ar filmoù-mañ war ur dirazon. Hag un ali diwezhañ em lakait plom dirak. Aesoc'h barn evelse.

Mikaël Madeg



"Martez ez eus bet tud o sellout ouz ar c'hleier van pellsel da 1 eur d'ar gwaer 24 a via Meurzh 1989."

Bervez ur c'helaouenner eus Antenne 2, ne vefe ar "brounoù" (1) nemet e Kinheim e Bro-Elzas. Paos eo kement-se met da gentañ, petra eo ar brou- noù ?

E Bro-Loren e vez lavaret ez a kuit ar c'hleier da Roma da vare Pask. E Bro-Elzas, e Bro-Loren hag e Bro-Luksemburg tveo zo bet dalc'het ur c'hiz hengounel : pa ne vez ket sonet ar c'hleier ken e ra trous ar vugale gant strakerioù ha gant binvioù iñpial heñvel ar- walc'h ouz strakerioù brus. E trefodach lorenek e vezont anvet "taquattes". N'ouzon dare petra a vez graet anezho e gal- leg (sellit ouz an dresadenn deknikel).

A-raok e vezomp ugent pe bemp bugel varn-ugent o c'ho- ri/ober ar brounoù met ne oa nemet seizh bugel ar bloaz-mañ. Spi an eus e chomo ar brounoù e Loren atav. N'eus yezh a-si- fora'h ebet gant al Loreniz ha gant ar Vojaned(2) da ziskous- o fereonelezh-pobl, ur poues- o fereonezh hepen, an nebeut hen- nouezh hepen, an nebeut hen- c'hizioù ha gerioù o trefo- dach.

Evit pezh a sell ouz Bremañ, sklaer hag aes-tre da lenn eo ho kasetenn. A-drugarez deoc'h ez eus tu din resev ke- leier eus Breizh.

Kalon vat d'ho skipailh!"
Andrev Touchet (Nancy)

- (1) Brounoù : brouans e trefodach lorenek. Ur brouan a zo 'ur straker' e trefodach, marteze diwar ar ger brouhaha e galleg.
- (2) Ar Vojaned : E bro-Loren e vez diforc'het al Loreniz di- ouz ar Vojaned. Un "nouveaux" divoutin eo ar re-mañ (evel bro Wened e Breizh).

E Bremañ ho peus skrivet: "A-benn pegouls un timbr e en- nor d'an abad Gregoire, enoret gant ur straed e Roazon ?"

E Loren e vez brudet-tre an abad Gregoire -maleizusant- difenner ar sklavet, hag ar yusvien e vefe bet met a-enep d'an holl trefodachioù ha d'an yezhoù romanselel. Gaset eo bet an Abad e vefo, 20 kilometrad eus ti va zad. Ar vesh !

Owellañ goure 'hemmennoù.
Andrev Touchet (Nancy)

STAJOU VAKANSOU PLIJUS



Stajou ha vakansou brezhonek



an Oaled

Kreizenn Sevenadurel Brezhonek
Centre Culturel Breton

22110 Treglonoù - Follgoaz - 98 04 07 04

EVIT AR VUGALE (8-12 VLOAZ)

Kinnig oberioù brezhoneg d'ar vugale a zo anezho brezhonegerien mat dija, setu ar pezh hon eus klasket ober dreist-holl en OALEL, betek-hen. Koulskoude ez eo abouez ivez d'hor sonj, aozañ stajou divyezhek evit bugale na ouzont ket brezhoneg c'hoazh met a fell dezho deskiñ. Setu perak hon eus divizet kinnig bremañ bep bloaz ur greizenn vakansou divyezhek e-kerz an hañv.

Reiñ d'ar re yaouank ar c'hoant hag an tu da zizoleiñ yezh ha sevenadur Breizh, en ur dremen vakansou plijus, setu ar pezh en em roomp da bal evit an devezhioù-se.

Deizhioù ar c'hamp-mañ a vo eus an 2 aviz Gouere da 6e30 d'an endevzh betek ar 14 (tro 2 eur goude merenn). Priz 1700L

KAMPOU HOLLVREZHONEK

EVIT AR VUGALE (6-12 VLOAZ)

Evel bep bloaz e vo aozet daou gamp hollvrezhonek evit ar vugale 6-12 vloaz. A-bep seurt oberiantizoù a vo : c'hoarioù, sportoù, c'hoariva, labour-dorn hag all...

UNAN A VO E MIZ GOURE : eus ar 16 d'an 30 a viz Gouere.

AN EIL A VO E MIZ EOST : eus an 3 d'an 13 a viz Eost 89.

STAJ BREZHONEG

Digor int d'an holl, de-raouidi koulz ha tud o deus kroget da studiañ ar yezh dija, o-unan er ger, dre lizher pe gant kentelioù noz.

Strolladoù labour a vo savet hervez live ar stajidi ha kentelioù a vo a-hed an devezh, bellhadegoù, prezegennoù ha divizoù a-zivout ar sevenadur vrezhonek a-vremañ o vezañ kentoc'h aozet diouzh an noz. Klasket e vo dreist-holl implij ar brezhoneg ar muiañ posubl e degouezhioù boutin ar vuhez pemdezhek.

Eus ar 16 d'ar 25 a viz Eost e vo ar staj-mañ. 1500 Lur

STAJ KEMBRÉ-BREIZH

Muioc'h mui e teu da vezañ dedennet ar Vretoned gant yezh ha sevenadur Bro Gembra hag ar Gembreiz gant yezh ha sevenadur Breizh.

Un dra vat eo e gwirionez kaout darempredoù etre an div vro evit dont a-benn da gompren gwelloc'h petra eo hor personelezh sevenadurel, da belec'h ez a hor stourm ha perak eo ken heñvel ha ken disheñvel war un dro, stad an traoù e Kembre hag e Breizh.

Evit an abegoù-se e vo kinniget en OALEL evit ar 6vet gwech, eus ar 16 betek an 22 a viz Eost, ur staj digor d'an holl vrezhonegerien dedennet gant yezh ha sevenadur hon div vro.

Kentelioù kembraeg ha brezhoneg a vo, hervez live ar stajidi ha bep noz e vo aozet bellhadegoù, prezegennoù ha divizoù war zanvezioù liesseurt o tennañ da vuhez a-vremañ an div vro.

Priz ar staj-mañ : 2700 Lur
Evit mont d'an estrenvro ez eo ret da bep bugel kaout : ur gartenn-anv, hag an aotre da vont kuit eus Stad-C'hall.

AN OALEL 29214 TREGLONOÙ
pellgomz 98.04.07.04.

KANEVEDENN

Setu an amzer vras deut en dro. Tu deoc'h d'ober troadoù war ar maez, da gouronkañ, da soñjal er vakansou o tont, ha setu miz diwezhañ ar bloavezh evit KANEVEDENN, soñjet hon eus kinnig deoc'h savadennoù diapozitioù da soñjal en ho vakansou marteze, na petra 'ta !!

Ur bourmenadenn a ivez da zizoleiñ an natur hag arak dispartiañ, ur pred evel bep bloaz bremañ, war ar maez.

D'ar Gwener 9 a viz Mezheven 89 da 8 e 30 noz, ur savadenn diapozitioù kinniget gant E.JOUAN diwar-benn BRO INDEZ.

D'ar Gwener 16 a viz Mezheven Da 8e30 noz, ur savadenn diapozitioù diwar-benn Bro Skos-Nevez, bet gweladennet gant Paol AR MEUR er bloaz paseet.

D'ar Sul 18 a viz Mezheven 89

Ur bourmenadenn a-hed an aod etre Plougerne ha Gwiseni, bliet gant Tudual HUON evit gwellet lapoused korn-bro ar VOUGEV ha paludoù GOULC'HAN. Degaset hezoù ha lunedoù-kreskiñ. An emgav a vo da 2e30 e kreizenn ar vrezhonegerien ha da 3 eur en ostaltri AR FLASH e Plougerne. Pellgomz en arak ma fell deoc'h d'ar : 98-80.73.83.

D'ar Gwener 23 a viz Mezheven

Da 8e30 noz, ur gaozeadenn gant Kristin PELLE bet e bro Skos e miz Ebrel paseet evit studiañ stad ar Gouezleg du-hont. Kaset eo bet gant burev ar yezhoù bihan (minorelezh) ar GEE. Un nebeut diapozitioù a vo diskoezet ganti, peadra da geñveriañ stad hor yezh gant hini Bro Skos.

D'ar Sadorn 1 a viz Gouere 89

Ur pred war ar maez, e KERGOUNOÙ e parrez Lanniliz. Kregiñ a rae da 7 eur gant ur digor-kalon, ha war-lerc'h berouigoù kig rostet mar plij !!! Plija-dur e-leiz neuze... digaset ho pinvioù sonerezh pe ho kasetennoù. Soñjit lakaat hoc'h anv arak ar : 27 a viz Mezheven, en ur bellgomz da vurev An Here : 98-80.72.03. pe da Yann-Fanch Kerneis : 98-05.21.17. -

24-29 a viz Gouere 1989 : Kendalc'h keltiek 89 a vo dalc'het e Lesneven. Ezhomm ez eus skoa-zell e-pad ar sizhun-arak (17-23) ar c'hendalc'h hag e-pad

ar c'hendalc'h ! Ma 'z loc'h prest da reiñ un tamm skoa-zell pellgomz da : Yann DESBORDES 98-83.70.17. pe Jorj ABHERVE 98-83.70.89. pe er Bed Keltiek (bouetaet ha lojet e vo an dud)

	I	II	III	IV	V	VI	VII	VIII	IX	X
1	L	A	M	O	U	T	E	L	E	L
2	L	A	M	M	E	T	E	R	I	
3	P									
4	R	E	N	A						
5	O	Z	O	M	B	R	E	I	E	
6	V	H	E	L	G	O	N	Z	E	R
7	I	L	E	G	A					
8	D	E	R	L	O	M				
9	A	R	A	V	O	E	N	V		
10	W	E								

GERLIOU KROAZ MIZ MEZHEVEN 1989
gant F. AR C'H.

- a-Led
- Gouzout - egile -
 - Meur a hini er Menez-Du -
 - Deverañ a ra e Bro-Italia - Deverañ a ra e Breizh - Deverañ a ra a-us deomp.
 - Komz a ra a-dreuz hag a-hed -
 - Gwarez diouzh an heol - Benveg da vrientañ loened 'zo -
 - Ker-vaat e ra ar son -
 - Kêr alaman - Ur sant e-tal nor Breizh
 - Gwez - Gwez adarre -
 - Ger-mell - Benvegenn - Ul lec'h bennak -
 - Dreist-penn - War-du an traoù -

- a-serzh
- Evit gwiriañ hag anaout -
 - Koulskoude - Stagañ a ra -
 - Ger-mell - Ar gwinter kentañ -
 - Faehz gant an droug pe ar skuzhder - Reiñ a ra al liv -
 - Haroz gresian - Beg ar genou - Melen en e greiz -
 - Feurvañ emañ e penn an orjalenn
 - Bremañ emañ -
 - Hinnal a ra - Kement hini -
 - Merkal a ra eo bet tizhet ar pal - C'hwel ha se -
 - Frank - War harzoù tri departamant.

	I	II	III	IV	V	VI	VII	VIII	IX	X
1	D	E	A	N	L	O	S	K	E	
2	O	N	N	S	E	E	R			
3	U	G	E	N	T	V	E	D	E	R
4	A	R	Z	O	U	R	I	E	Z	H
5	R	O	E	M	A	N	H			
6	N	E	P	M	O	L	L	I	S	
7	E	Z	E	L	U	G	E	N	T	
8	N	I	I	Z	A	A	G	A		
9	E	O	U	L	K	E	R	N		
10	Z	U	R	I	C	H	R	A	K	

MIZ MEZHEVEN 1989

TAOLENN

BREMAN NIVERENN 93

Lizhiri.....	2
Profoù.....	2
Dilennadeg Europa....	3
EUSKADI.....	4
BREIZH : URANLON.....	4-5
Bretoned bac'het.....	5
S.A.B.....	6
Europa Lingua.....	6
DIWAN.....	7
Frañs hag all.....	8
Kuzul Sevenadurel....	8-9
Deug e Brest.....	10
Berr ha Berr.....	11
Gouel an Erminig.....	12
Kendalc'h Keltiek.....	13
TAOLIOU IMOR.....	14
Divan Roazon.....	15
Dudi.....	16
Filmoù Kembre.....	17
Stajou Hañv.....	18
Kanevedenn.....	19
GERLIOU KROAZ.....	19
MESK DIVESK.....	20

ar pennadoù gant Gwenael Caradec, A.R., Yann Leskildri, I.K., Herve Tangi Alan Riou, M.K., Yann Gefeleg, S.M., Anshel Babbel, Anne Louise Delahaye Yann Menozek, Mikael Madeg Andrew Touchet, Garan ar Meur, Y.Desbordes. T.L..

ar maketenn gant Annaig Lagadec, Nolwenn Louarn, Jean-Michel Roynard, Mikael Baudu ha Lena Louarn

Luc'hskeudennoù gant Gwennole Ar Menn, Lena Louarn Mark ar Briz, A.Vari Chapelain.

Tresadennoù gant Paskal ar Marc'heg - Malo Louarn

RENER BREMAN Mikael BAUDU

Moulet e ti an O.S.C.R. Tachenn Meurzh Roazon
SKRIVIT E-BARZH BREMAN !

Kasit ho pennadoù, keleier a-raok ar 1añ a viz Gouere. 8, straed Hoche Roazon

MESK DIVESK

Petra a ra an daou vugel-se war vord an hent ? Diskouez un tamm paper war zu ar c'hirri-tan a dremen a-leizh dirazo, ya sur, met deus va hini o tostaat outo, n'on ket evit lenn ar pezh a zo bet skrivet. Ha diouzh gwelout o gwiskamantoù hag o stumm, m'eus aon, emaint o c'houlenn an aluzen. Tud war an aod a vez gwelet kalz gant ar vicher klas-ker bara, met bugale n'eus ket anezho peurvuiañ, nemet e broioù an trede bed.

Ne fell ket din chom a-sav ha diskenn koulskoude, rak santout a ran un dro-guzh pe un dro-gamm bennak. Gant gwir abeg, rak a-boan erruet er bourk tostañ, en em gavan gant an daou ganfard o tiskenn d'eus un oto dalc'het gant ar Sikour Katolik hag o lammat en ur c'harr all nevez flamm.

Ha tra ma ruilhomp asamblez war an hent bremañ e c'hou-lenn ar paotr bihan digant ar blenier perak emañ ar vaouez en e gichen o tostaat he dremm hag he muzelloù etrezek ennañ. Ne sell ket ouzhit ! emezañ. ■

Kerzhout, mont war-raok, heuilhañ ar re all ha mont dreist dezho zoken, pe neuze bezañ flastret ganto betek gant ar re dostañ. Gwall blijus eo tonkadur mab-den. Evidon-me ne c'hellan ket pourmen hep lezel roudou war va lerc'h. Dalc'het am eus soñj eus ur bourmenadenn gant ur vaouez e-kreiz koadeier : a-feur ma valeemp er gwenojennoù e oa ret deomp en em zizober eus pakadoù ponner a-walc'h hag iskis o danvez.

Ur wech all, un nozvezh-pad, em eus tennet boulouigoù houarn lufus eus va dent, eus va dent a-raok dreist-holl, hag an tammoù-se a skopen a bep eil war an douar.

An tammoù-se a oa heñvel ouzh ar re chomet peg ouzh va zeod en degouezh-mañ : dirazon e welen ur plac'h gant he blev du, he c'hein hag he fenn nemetken kentoc'h, dre ma oamp o sellout ouzh un arvest bennak. Petra 'zo bet c'hoarvezet gannin ? A-daol trumm em eus digoret va beg ha kroget en he blev ; n'eo ket chomet an dimezell o c'hortoz gwell, steuzet eo kuit ha me zo manet gant



blevigoù houarn maentouchet ouzh va zeod. Santout a ran anezho c'hoazh. ■

Bremañ e vez kaset an holl vugale d'ar skol gant o zad pe gant o mamm gant ar c'harr-tan alies. Ar bugel a chom hep santout an aer fresk oc'h hilligañ e fronelloù, ar glizh o naetaat e zremm, ar glav o c'hlebiañ e vlev. Chom a ra un neubeut tiez feurm tost ouzh ar skolioù memestra, hag un neubeut tadoù a blij dezho ambroug o mab pe o merc'h betek ar skol.

Pa oan degouezhet en ti-se just a-walc'h e oa didud, aet e oa an tad betek ar skol. Ne oan ket bet biskoazh eno, ha koulskoude ne oa ket divoaz din ar pezhioù, an arreburi, hag an traoù e-barzh.

Den en ti, n'eus forzh, un tamm naon a zo deuet din hag e fardan un tamm pred. Daoust hag eo reizh en em staliañ e-stumm-se e ti tud dianav krenn din ? ■

N'eus ket pell e oan en un ostaleri ouzh taol gant un dousennad a dud, en o zouez ur vamm gozh, daou skolaer, hag ur c'houblad labourerien douar. Met perak eo torret eured ar re-mañ abaoe meur a vloaz ? Goul' a ran diganto memestra penaos emañ ar bed gant o bugale. Gant flapadennoù an



hini gozh, digomprenus koulskoude, ne glevan ket o respont.

Ur banerad oranjez a vez degaset deomp war an daol gant mestr an ti : unan anezho a zo brein penn da benn.

Ul listennad tud a zo da sevel evit mouezhiadegoù tost : dalc'hmat e vank un den evit klokaat anezhi.

Ne choman ket gant an dud-se aze. Ret eo din... .. mont d'un eured a zo da vezañ lidet en ur sal-vras er skol-veur. Keit ha ma ya ar gouviidi e-barzh, e klevan a-greiz-holl un den oc'h huchal ne vez ket graet an traoù war un ton bras a-walc'h : servijet vez champagn ha gwin neuze. Traoù all, emezañ, a zo da vezañ diskoulmet, en ur ziskouez un toull en ur voger.

En trepas a-dreñv an toull, en em gavan da gentañ gant ar memes mamm-gozh a glask feurmiñ he zi, daoust dezhañ bezañ bihan ; pelloc'hik emañ un tad-kozh o kinnig un ti ivez, kalz brasoc'h ha gant ur c'hgrignol.

A-daol trumm e troc'h an tredan hag en em gavout a ran en deñvalijenn du-pod. ■

Ur vaouez dougerez a gejan outi, e-kreiz ur prad. N'emañ ket pell ar gwiliouderezh, hervez ar pezh a gomprenan. Met perak emañ staliet aze en ur park didud ? Hiriv an deiz e ya an holl mammoù d'an ospitalioù modern-tre gant mekanikoù a-leizh, ken eo gouest ar vezeien da lakaat an natur da blegañ d'o bolontez ha d'o eurvezhioù-labour.

Amañ war ar geotenn emanon, emezi, ha ne fell ket din kuitaat al lec'h diouzhtu, pe

neuze e vo ret asant d'am goulennnoù. En ur gaozeal ganti, e komprenan n'eo ket resis tre he c'hoantoù, nemet unan evel just... Ha perak on karget me da varc'hata ar pal-se ganti ?

Ur c'havell o vransigel-lat ; bep tro ma fiñv, e stok ouzh ur voger, hag e sant ar babig un tamm poan d'e gorf o skeiñ... ■

GARAN AR MEUR